

IPRON VARIA AR VUR,  
PEDIT EVIDOMP.

RECIT CURIUS

*Eus ar pez so bet éruet e Montroulez var sujet  
ar Religion, adalec er bloa 72, goude Gui-  
nivelez hor Zalver, beec fin 1820.*

VAR ION CHRIST BRAS AR VUR.

**G**UERC'HEZ glorius Vari, Patronez Montroulez,  
C'houi a voe en peb amzer hor guir Advocadez,  
Deurvezit, mar plich ganeoc'h, cundui va fluen,  
Ma rin amàn ur Recit d'am breudeur Christenien.

Anez ho proteccion, ô Güerc'hez adorabl!  
Daouest d'am ol bolonte, biqen ne ven capabl  
Da zonet da gomposi d'am brois ur Recit  
Pieni a vez cavet beza dign a verit.

Mes, crén demeus ho sicour, e zàn da zisclérys  
Traou hac a interesso Christenien ar vro-mâ.  
Mont a ràn d'o merqa deoc'h amàn var ar papers;  
Selaouit ol, me ho ped : antren' ràn en matier.

Bremàn eta, Bretonet, vit réy deoc'h da éntent;  
E zeus just seitec cant vloas hac eiz ha daou-uguent  
E tiambarqas amàn, évit hor bonneur-ni,  
Drennalus, genta Disqib Joseph d'Arimathi.

Qerqent e convertissas an ol Vontroulezis.  
Hac er penn eus ar C'hoc'hi e constru un Ilis;  
Peini voe dediet d'an Otrou Sant Jacques :  
Ar guenta Ilis Christen eus a guer Montroulez.



En traon eus ar ru Feunteun e sao ur golonen,  
Var beg pini e laqas neuze Croas al Letein,  
Hac eus an troad e plaças guir boriveret Mam Doue,  
Elec'h ma talc'het goulou hac en nos hac en de.

Aben nao bloas ha trêgont goude maro Jesus  
E v'pamp-mi ta Christenien, dre zoignou Drennalus;  
Se a voe abeurs Doue ur bredileccion  
Da veza bet qerqent-se ar guir Relijion.

Ar Feiz o veza cresqet er guet a Vontroulez,  
E teujot da vatissa hon Ilisou Pares,  
Couenthou ha Chapelou, dre zêl ar Vourc'hizien,  
Voa devot bras d'ar Verc'hez, ha scüer d'ar Gristenien.

Er bloavez unec-cant-dec, voe da guenta fondet  
Bars en Ilis Sant Vaze Breuriez an Drindet.  
Sant Martin, Sant Malani, Sant Jacques, Sant Vaze  
A voa peder Prioldi a Venac'h d'ar c'houlz-se.

Hac er bloavez daouzec cant eiz ha trêgont voe grêt  
Couent caer Sant Dominig, ha qerqent dediet.  
Evo voa Pales an Duc, e verjer, e jardin;  
O réy ol a ras d'ober un Templ' d'hor Mestr divin.

Gant plijadur, Bretonet, e cléfol, m'en assur,  
Peur e voe fondet Ilis Itron Vari' ar Vur:  
Le bloa daouzec cant pemzec ha pévar-uguent voe  
Comancet Ilis Mari, Mam d'an Otrou-Douc.

Deiz Gouél Mari Anter-Eost voe fondet ar Chapel,  
Er plaç choazet gant an Duc, en traon eus ar C'hastel;  
Laqat a ras eiz Béleg vit ober an Ofiç,  
Ar pez a gargas a joa an ol Vontroulezis.

Ar Gouél ma voe digoret dre ur Procession,  
E pini voa ur foul vras, leun a zevocion:  
Er penn aroc voa an Duc Yan daouvet a hano,  
Béleyen ha Bourc'hizien, hac ol Noblanç ar vro.

Ar Provincial a Franç voa an eil asistant,  
Escop Dol, Escop Naonet a voa ive present;

Guillou eus ar Roc'h-Tanguy, Escop eus a Roazon,  
Ha Guillou a Kerzozon, Escop eus a Leon.

Unec vloas ha tri-uguent goude ar Gouiel caer-mâ,  
Deiz Anter-Eost voe placet neuze ar men genta  
Eus ar Porchet mansiq demeus Ilis ar Vur:  
Qementse so affirmet deomp ol dre scridou sur,

Demeus Ilis Sant Vaze voe neuze transferet  
Da Ilis Vari ar Vur Breuriez an Drindet,  
Elec'h ma zeo bet heuillet gant guir devocion,  
Betec ma voe comancet ar Revolution.

Er bloa pévarzec cant eiz ha tri-uguent e voa  
Dediet Ilis ar Vur d'an Itron Varia:  
Ar vrassa solemnite a voe neuze eno;  
Tud a voa en em gavet a bêvar c'horn ar vro.

Ur bloas ha triégont goude e voe fondet enni  
Breuriez ar Chandelour, en honor da Vari,  
Dre ur Bul demeus ar Pab Alexand c'houec'h hanvet;  
Guillou Guicaznou'r Provost, en doa he goulennet.

Dec vloas goude, a neve e rejot construi,  
Divar goust tud ar baros, Ilis Sant Malani;  
An Tour a voe construet ive neuze ractal,  
Ha Chapel Santez Barba en qichen an nor dâl.

Yan Calloet, a Lannidi, Escop a Landreguer,  
A zedias Sant Vaze qazi'r memes amzer,  
Hac a fondas diou Zervich evit ar re varo,  
Ar pez a gresqas ferveur Christenien vad ar vro.

Ebars er bloavez pemzec cant eiz ha daou-uguent,  
En dec eus a vis Gouere dre c'braç Roue ar Zent,  
Voe batisset an Tour caer a Ilis Sant Vaze,  
Pini hon eus ar boneur d'admira c'hoas hirie.

Er bloa c'houezec cant unec neuze e voe poset  
Ar men genta fondamant eus ar Gabucinet.  
Ur gurun an horruplâ, seiz vloas just goude-se  
A ziscar beg Tour ar Vur : an ol a spurone.

Unec vloas goude n'ar-mâ. Couent caer Sant Frances  
 A voe neuze construct, tostic da Vontroulez ;  
 Hac abars daou vloas goude, Oïrou Escop Treguer  
 A ras ur Brocession partout en dro da guær.

Demeus a Ilis ar Vur e tong ar Sacramant,  
 Gant calz a zolemnite hac ur galon fervant,  
 Betec Ilis ar Feunteun, elec'h m'oe instalet  
 Goude an Ofiç divin, ar C'harmilitezet.

En c'hoezec cant eiz varnuguent Processionou qær  
 Deiz Sul ar C'hasimodo n'en rentas er C'halver,  
 Evit biniga Croas ar Venedictinezet,  
 En penn eus ar ru Blouyan, en pelec'h voa plantet.

En Montroulez e zeus c'hoas bet, mes pel goude-se,  
 Goëliou caer, Missionou, dre ar c'hraç a Zoue.  
 An dud coz a Vontroulez n'o deus qet sur ancouët  
 Sant Fidel ha Sant Loranç eus ar Gabucinet.

Nao bloas ha daou uguent so voe Sant Martin dêvet  
 Gant an tân eus an êuvoù voa varmezi coezet ;  
 Ur bloa varnuguent goude voe grêt unan neve,  
 A zo ur pez ar c'baera a veler er c'hontie.

Qent ar Revolution e velet er guær-mâ  
 Chapelou ha Couentchou, Ilisou ar c'baera,  
 Pere a vije carguet bepret a dud fidel,  
 Da zervichout da exempl d'an ol ep Breiz-Izel.

Trivac'h Ilis ha Chapel voa en dalc'h Montroulez  
 Ilis ar Vur viniguet voa evel ar Vestrez ;  
 Sant Vaze, Santez Mac'harit, Ilis Sant Dominiq,  
 Hac en traon voa'r Chapel gôs a Zantez Veroniq.

Ar Gouent, Santes Martha, ar C'harmilitezet,  
 Ar Vadalen, Sant Nicolas, hac ar Gabucinet,  
 Ar C'halver, Sant Malani, Sant Frances, Sant Martin,  
 Itron Vari a Vertu, Chapel Sant Augustin.

En Hospital voa ive ur Chapel ar gaera,  
 Hac etal Sant Malani hini Santez Barba,

Ah! nac a Blisou Zantel a voa en amzer-se,  
Elec'h ma rennet beude homajou da Zoue!

Placen Ilis Sant Jacques a voa guechal arnet  
Eus ur Gross men, ar gaera a oufjet da velet,  
Sant Jacques ha Sant Christoph, peziou voa hep o far,  
Mes brizillonet int bet eno var an douar.

Ebars ruyou Montroulez ne rêjet qet ur pas  
Hep eus hon Relijion guelet mesqu'al c'hoas:  
Perzier qer, calz a dies a Zent voa decorer;  
Mes, evel an Ilizou, ol int bet destrujer.

Bars er bloa seitec cant seiz, an ugent a Voere,  
E varvas Frances Jagu, Person a Zant Vaze,  
Leshanvet ar Viqel-Zant dre bêvar c'hornu ar vro:  
Pedomp-én a vouir galon, Doue hor zicouro.

E blijadur voa bepret ober vad d'ar beorien,  
Hac eus a greis e galon instru ar Gristenien.  
E vertuz, e veritou, hac e vuez santel  
A ra ma zeo veneret dre ol en Breiz-Izel.

E penn Bêred Sant Vaze, a harp eus ar Garnel,  
A ziouc'h e vez voe savet d'e honor ur Chapel;  
Eno an ol' admire portret ar Viqel-Zant,  
Qer, joatûs, ma lavarjet e vije o parlant.

Nac a vugale yaouanq zo bet dezân goestlet,  
Evit goulen e zicour ebars en o c'blêvet!  
Guelet a reomp bemdez graguez o vont gante  
Da accomplissa vœuyou grêt d'an den zantel-se.

Calz a dud zo o teport ma vo canoniset;  
Ni, Montroulezis, hon eus atao ze deziret.  
Pedomp Doue a galon ma velimp an diase,  
Hac ive plaç e Imach en Ilis Sant Vaze.

E Santez Mac'harit voa ur Gongregacion,  
Peini a inspire calz a zevocion.  
Castel ha Landivisiau, devotoc'h eguet ni,  
O devous renouyelet pepini e hini.

Pelec'h medi an amzer en pini e velet,  
 Achapet eus an tempest, hac er porz êruet,  
 Ar Vartoloder Christen o tont d'accomplissa  
 Vœuyou da Ilis ar Vur, en ur stad an trista!

Eus o lestr e partient, hep habit na besten,  
 Hep toq, na louer, na boutou, en o dorn ur cietjen,  
 En ur gana assambles *Ave, maris stella,*  
 Ar pez certen a laqe ar galon da ranna.

Rentet en traon'r pasiniou demeus an Templ divin,  
 En em stringent d'an douar var bennou o daoulin :  
 Pardon! pardon! emezo, pardon! ô Mam Doue!  
 Penevert ho madelez ne voamp qet en buc.

Neuze' pignent d'an Ilis, leun eus a drugarez,  
 Elec'h ma vije canet dê Ofern ar Verc'hez.  
 Pebes ferveur o devoa! pebes devocion!  
 Ah! pebes triumph ive vit ar Relijion!

Ret eo din despeigni deoc'h bremâ ar Verc'hez-mâ,  
 Rac calz ac'hanoc'h biscoas na velas ur seurt tra :  
 Sellit-hi peguer tener, peguer carantezus  
 E teu da rêy da zena d'he Mabiq qêz Jesus!

Peguen admirabl e zeo he guelel digoret!  
 En he c'hreis e contempler tri Ferson an Drindet,  
 Hac en he diou gostezen e veler gant eston  
 Peinturajou ar c'haera eus ar Relijion.

Nebeut Touriou a velet, me a el en assur,  
 Da veza comparajet demeus Tour caer ar Vur,  
 Nac Ilis a inspire muy a zevocion  
 Eguet sur ma rê hini bor Mam hac hon Itron.

Troubli a ra va speret, ranna ra va c'halon,  
 O compren en horreurion grêt d'ar Relijion;  
 Darn vras eus hon Ilizou a so bet distrujet,  
 Ha ne chom ganecomp bremân cazî hini ebet.

Ebars en amzer horrubl ar Revolucion  
 Ne velemp en dro deomp-ni nemet destruccions;

Mes an dra ar c'hruella voe g'uelet, a dra sur,  
Dont da zistruch, dre arrach, Ilis santel ar Vur.

Hor Batronez voe neuze chasset eus he zi,  
Casset da Zant-Dominic, hac ar C'hrist-Bras ganti;  
Ha goude e voent placet en Ilis Sant Vaze;  
Mes cetu int hep Oter hac hep Templ adare.

Pa voe dic'bradet ar Vur er Revolution,  
Voe grêt anez un Templ, hanvet Templ ar Rêion,  
Mes rên an Douees-mâ ne badas qet guel pel;  
Ne ras nêmet passeal, vel ma ra an avel.

An Ilis a voe neuze souden eta guerzet,  
Ha qerqent e voe ive en antier discaret;  
An Tour a chomas neuze izolet goude-se,  
Hep souten en nep coste evit he surete.

O Doue! pebes maleur a êruas goude!  
Fremissa ra va c'halon pa zonzân c'hoas en se...  
Va goad a deû da sclassa, va daelou da redet,  
Va fluen a grên em dorn, va speret zo-troublat.

An eiz varnuguent a Veurz, un devez a voener;  
Bars er bloa mil eiz cant c'houec'h, ol habitantet qer  
Occupet vel ordinal demeus o afferou,  
Ne zonzent qet maruze ebars en maleurion.

Goude lein, vardro un heur, Tour ar Vur a fraillas,  
Ha gant un drous horrerus prest ractal a goeas;  
An ol dud eus ar c'hartier voa qement spouronet,  
Ne vouient qet pelec'h chom, nac en pelec'h monet.

Ar Mêr hac ar Sou-Prefet qerqent a êruas,  
Ha calz demeus a guêris ive en em rentas;  
An ol voa leun a galon evit douguen sicoqr  
D'an dud a voa entêret eno dindan an Tour.

Ar Zacrist voe ar c'henta a deujot da gavet;  
Beo e voa, dre c'braç Doue; mes, allas! goal vlesset.  
Pemp den al a voe lazet, hac ur buguel ma bloas  
Voe cayet dindan un dol, mes hemân a vev c'hoas...

Ledan plac an Oter-Vras demeus ar Ilis ma  
 E. vejer c'hoas religou en ur stad an trista  
 Pedomp ma vint deposet gant respet er Garnel,  
 Da c'hoaroz beza galvet d'ar Varn Universel.

An dri eus a vis Even eus bet d'ou vloas e voe  
 Gouel Carousation Santez Angel ive  
 Ebais er Gouent neve, elec'h ma voe placet,  
 Evel guir Fontaprez d'an Ursulineset.

Sant Vaze, dre he c'hozni, so nevez condaonet  
 Da veza ractal serret, ha soudien reparaet;  
 Rac-se ta, oll-guenvrois, en em glévomp brema  
 E vit gallbut, hep dale, dont d'he adbatissa.

En defot eus ar Ilis, vez benidez digoret  
 Porchet Ilis Sant Vaze, hac eno recevet  
 Offrançou ar Gristenien, e vit sicour ober  
 Un Ilis neve eno e vit Paros da Guær.

Domp, dreist ol, Montroulezis, demp-ni eo da guenta  
 Da zont da ray an exempli da ol dud ar vro-ma;  
 Rac-se greomp hor possabl ha bezomp jenerus  
 E vit sevel hep dale un Ilis da Jesus.

Cetu aze, Bretonet, ar pez so êruet  
 Er guær eus a Vontroulez, en amzer dremenet.  
 Contant ven eus va Recit, mac'h alfe dont aber  
 Da ogmanti ar ferveur etouez ar Gristenien.

Pedomp Doue da asten d'hor Pastor ur vue  
 Qer precius d'e zénved, ha d'an ol er c'hontre  
 Pedomp en da gonservi demp-ni, Montroulezis,  
 Ur Person a so qer dign da c'houarn hon Ilis.

F I N.

---

E MONTRouLEZ, e ti LEDAN. -- Qerzu 1820.